

# **BOURDOULOUS Jean** (Gouezeg 1855 - Douarnenez 1915)

## **Taolenn**

Ar haz hag ar vugel.

Ar bik, ar Goulmik hag ar Paun.

# Ar haz hag ar vugel

Yez Treger (*Modernnaet eo bet an doare-skriva*).

*War don : Petra 'zo a-nevez en Kêr-Iz.*

Eur bugel war dreujou an ti  
'Oa en e goazez o tebri,  
Gantañ en e zorn eur grampouezenn  
Hag eur haz bihan 'n e gichenn.

Ar haz 'ra fistoulig ken brao,  
Ken flourig eh astenn e bao  
Ma kav d'ar bugel 'n-eus ar haz  
En e geñver karantez vraz.

Sed ar bugel kavet gantañ  
Eur mignon euz ar re wellañ !  
Ha kenkent e rann e grampouezenn  
Da rei d'ar hazig eur lodenn.

Ar haz liper, pa 'n-eus tapet  
An tamm 'nevoa c'hoant da gaved,  
Raktal a dro kein d'ar bugel,  
Ha gand e damm e teh pell-pell.

Nezue ar bugel difaiet<sup>1</sup>  
D'ar haz 'oe klevet o lared :  
« D'am hampouezenn eo oas mignon,  
Ha n'e' ket din-me, ampoezon ! »

---

<sup>1</sup> difaiet : en em douellet e-unan.

# Ar bik, ar Goulmik hag ar Paun

*War don : Petra 'zo nevez e Kêr-Iz ?*

Eun deiz, eur bik hag eur goulm wenn  
O-doa bet laket en o fenn  
Mond d'ober eur gwel karanteg  
D'an aotrou paun, o amezeg.

An aotrou, kerkent ha ma wel  
O tostaad an diou zimezell,  
A ya d'o haoud prim ha seder  
Da zigor deze dor e vaner.

Godue eru pennadig bizit,  
Ar bik, ar goulm a yeas kuit ;  
Hag, en eur vond d'ar gêr, ar bik  
Ne oe ket pell heb lared grik.

Ar gaoz war ar paun a lakas :  
« Gwelet az-teus e ziou holvaz ?  
O ! pebez treid, ha pebez mouez ?  
Roi peuh a dlefe gand ar vez ! »

« Me, oar mad, eme ar goulmig,  
Ne gan ket koulz hag eun eostik ;  
Med a-hend-all n'e' ket e vouez  
Ken divalo hag a larez.

N'ouzon ket, evid e zaou bao,  
Pe int 'zo vil, pe int 'zo brao :  
'Hed ar vizit, ma daoulagd  
War e vleo a bare dalhmad.

O vond war-nij a-dreuz ar bed,  
Em-eus gwelet traou kaer meurbed,  
Ha bleo ar paun e' kaerrañ tra  
Em-eus gwelet bete brema'. »

Tud 'vel ar goulm, e gwirone',  
Gwall stank ne gaver aneze ;  
Bemdez avad 'weler kalzig  
O kemer patrom ouz ar bik.

An den ha, dreist-oll, ar hristen  
A dle ober 'vel ar goulm wenn :  
Evelti diwallom eta  
Da zroug-prezeg euz an nesa !

